

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

81. AR POT BEGEK

( follennoù 246 - 247 )

Ar pot begek, var a glevan,  
a sav eun ti neve er blos-man  
fala la deri deik  
tra la leïk  
fa la da ri da  
tra la la

eun ti nevez a veïn a bri  
ag ive a mançonniri,

Laked e vo var an doën  
Diou rozen rus, diou rozen ven.

Na piou a ielo do diskenn.

Ar pod begeg sur a lavar  
Me o diskenna d'an douar.

Pignet e bed var an doën  
en avis monet de diskenn

C'hoant en deveus da pretenti  
e lod er veïn ag er bri  
Ag ive eur° vansonniiri      ° komp.: er ?

- Debonjour a joa en ti-man  
Jannik poutaou pelec'h eman ?

- Jannik poutaou man ked er ger  
ed e da bourmen gant Robert.

Ne meus affer a verc'het  
a ia da bourmen gant ezec'h.

Pa ia jannik poutaou d'an overn bred  
gant eur c'haros e ve konduet.

Konduet e ve gant eur marc'h gwén  
eur vrid arc'hantet en e ben.

Gant eur marc'h gwén ag unan du  
Ar pod begeg oc'h e kundu.

- Ganen, pod begeg, ne nem challet ked  
a zilled mad me zo gwisket  
a boued mad me zo kunduet

Ma na c'heus c'hoant da c'houd ha da kle'  
Gant piou eo 'chanson komposet

gant tri pod iaouank sans-sourci  
a zo e chom er fouassiri.

A gant eur meliner iaouank  
Pa voa e pourmen var bord e stank  
e vond da vellet e vestrez koant.

e lakad an tan var e biben  
a deud ar chanson en he ben

e deuet en e santimant  
e c'hompozi da zaou den iaouank.

-----  
VVVVVVVV

Louisa Hervieu, 6 février 1851

-----  
VVVVVVVVVVVVVV